

KANTIK

EN ENOR

DA ZANTEZ BERC'HET

Var tonn : *Ni ho salud, stereden vor....*
 pe : *Sellit piz ouz ann taolennou.*

1.

E Landuguentel, Esquibien,
 Ez euz eur chapelik vien
 En honor da zantez Berc'het,
 Guinidik demeuz a Zued.

2.

Savet e voue da vil c'huec'h kant
 Hac eur bloaz ouспен hanter-kant,
 Epad ma voa an Aotrou Bis
 Person d'ho tud, Esquibianis.

3.

'N Aotrou-ze gant devotion
 A reaz en chapel ar pardon,
 D'ar zul kenta a vengolo
 Ha d'an deiz-ze e vez ato.

4.

Neuze tenaz pelerinet
 Da vizita chapel Berc'het,
 Da glask pardon d'ho pec'hejou
 Ha remed euz ho c'hlenvejou.

5.

Da c'houl sikour digant Doue
 Evid ho c'horf hac ho ene,
 Dre brotection santez Berc'het,
 Dre n' induljansou ker t'rudet.

6.

Ar relegou euz ar Zantez
A zo en he chapel ivez,
Klozet en eur voëstr argant guen,
Da vil seiz kant tregont ouzpen.

7.

He zad a goësee beb guener
Hac a receive he Zalver,
Evit gounzanvi ar poanyou
A deue d'ezhan euz an ëvou.

8.

He mam ghez, kerkouls hac he zad,
A voa eur vaouez a skuer vad,
Hoguen, mervel a reaz prestik
Goude bea ganet he merc'hik.

9.

Ar c'hrouadur a voe maguet
Gant unan euz he mouërebet,
Eur melizour a vertuziou,
Hac ar skuer euz an holl mammou.

10.

Ne doa ket c'hoaz ouzpen deg vloaz
Pa glevaz prezek var ar groaz,
Ha disklerya ar bassion,
Ma taou-hanteraz he c'halon.

11.

En nozvez varlerc'h e velaz
Jezuz o vervel var ar groaz,
Rag eun evel d'ar vech kenta,
Pa varvaz var ar Golgota.

12.

Ar zonzj a bassion Jezuz
Voa evit-hi ker glac'haruz
Ma rede eur mor a zaëlou
Demeuz he daou lagadigou.

13.

Kredi a ree dez-hi klevet
Eur vouëz klemmuz o lavaret :
« Setu ama, o mestr divin !
« Va merc'h Berc'het, sellit ouzin. »

14.

— « Va Mestr divin, eme Berc'het,
« Va Zad, va Zalver benniguet,
« Aberz piou e m'aoc'hui aze,
« Perak e m'aoc'hui er stad-se ? »

15.

— « Me zo ama dre vadelez
« Evit tud kriz ha didruez,
« Evit tud dall ha tud ingrad
« A zisprij holl va grasou mad. »

16.

Ker skoët e voe dre ghemmen-ze,
Beb guech ma sonje goudeze,
E rede he daëlou ato
Hed he buez bet 'he maro.

17.

Da c'huezek vloaz voe demezed
Da Ulfon, prins euz a Zued,
Dre zentediguez 'vit he zad,
E timezaz a galon vad.

18.

Eis krouadur o devoa bed,
Bugale fur evel eled,
Dre ar ghelennadurez vad
A ree d'ezho ha mam ha tad.

19.

Pa varvaz Ulfon, he phriet,
Berc'het a guitaz ar brinset
'Vit galloud sikour ar beoryen
Ha 'nem rei holl d'ar binijen.

20.

Tregont vloaz, e fin he buez,
Berc'het a goësse bemdez,
Ha, dre vertu 'r gommunion,
E vague 'liez he c'halon.

21.

Nouennet ha sakramantet
Var eur pallen renn astennet,
Da unek vloaz ha triugent
E yeaz Berc'hed da douez ar Zent.

22.

Gand ar Pab Bonifas naved,
E voï kanonizet Berc'het,
D'ar zeiz a voëre mil tri c'hant
Pevar ugent dek hac unan.

23.

Setu eur meleour parfed,
Tud yaouank ha tud demezet,
Pep-hini a hell, en he stad,
Kaout e Berc'hed eur skuer vad.

24.

Krouadurez pur ha santel,
Merc'hik sentuz, pried fidel,
Grek charitabl. mam aketuz,
Guir zervicherez da Jezuz.

25.

Santez Berc'hed, hor mam dener,
Pedid evidomp hor Zalver,
Hon diouallit, deiz ha noz,
Ma z'aimp ganoc'h d'ar baradoz.

AMEN.